


# ZERR-NOZ

*Da Evnik-Arvor.*



*Ar c'haz a zon 'uz d'ar barouz, ha c'hoat - ha zo di-*

didrouz ha sioul 'vel eun iliz,  
War an douar e koue ar gliz.

Ebarz ar park, ebarz ar prat,  
'Ver dic'honet da labourat ;  
Klozet deliou ar bokidi,  
Al lapoused et da gludi.

Ha war ar bod, a-uz d'ar waz,  
Evnik bihan, c'hwi a gân c'hoaz ;  
Evnik bihan, poent e tevel,  
Gant aon na glevfe ar sparfel.

War ar roc'h vraz ema 'selaou,  
E lagad lemm ru 'vel ar glaou ;  
Evnik bihan, dous ho mouezik,  
Evnik bihan, et d'ho nezik.

Na glevet ket 'vel soniri,  
Soniri-noz ha kaniri,  
Soniri gaer hag a luskel ?  
Et d'ho nezik a denn-askel.

Et d'ho nezik 'skeud ar bod roz  
Kuzet du-hont e lein ar roz,  
Ma klevin c'hoaz arc'hoaz vintin  
Ho mouez ken douz ha ken skintin.

Et eveltan, et ma ene,  
'Trezek an Nenv, ar gwir Vene ;  
Et da zic'han epad an noz,  
'Skeud bok'di ar Baradoz.

*Ar Gall, Lok-Mikael an Traez.*